

450

Eñ eur c'harthier a Blouaret
E zeus un den paour a speret,
Hannet Laurantet ar Merer,
A bretant caout ur speret caer;
Gouscoude ne zeus get nemeur
Furoc'h eqctân en Lanveur. (1)

Plijout a ra deân cana,
Ha na ra nemet distona.
Pa ya da glasq ober musiq
Gant ur voez a gav manifiq,
E creder clêvet un arzen
O vrailload divar boez e benn.

Quimidic eo a Blounevé
Pot-campir parojoù ar c'hontre: (359)
Biqen caeroc'h echantillon
Eus an dud a zo dirêson
Na vo cad, labour vo reded,
Eus a Rom da grec'h Sant-Inec. (2)

Ar bêvarzec a vis guenner,
A gommanças hor guidaer, (3)
Eur chopinad gist en e zorn,
Pa voa casi gorret e forn,
Da brezeg da Blouaredis,

(1). - Elec'h ma zeus un hospital còs evit an
dud foll.

(2). - Village, ar Merer.

(3). - Merer.

Var ton: Pa antreas ar yar en ty.

(358)

Hac en ancoù e gateqis.

Mar quell prezeg eur stoter fall,
D'ar Person, d'ar Meur, d'an dud all;
Perac n'elfen-me get ive
Paour qes gemener eus an de,
Prouvi, daonet vo va butun,
Eo trec'h ar vesqen d'ar vulzun.

Piou benac na sonch get ervat
Arauc comz, a lar comzou plat;
Arbet eo d'ar speret cousquet
Vel a res hini Laurantet,
Pa deuas da gomposi eur son
Elec'h neus na rim na rêson.

(360)

Mes poent eo antren en matier,
Qentoc'h e vo fin d'an affer:
Commançomp-ta hor c'hanouen
Dre laret da Laur an arzen
Penaus ar prez a zo blamet
Gantân en ilis zo parfet.

Den n'en devoa bet ar greden
Vije lest en noas ar gojen (1)
Nemet Laurantet ar Merer,
Pini ne voar get e Batez,
Na memes en petore penn
E ve laret an oferen.

(361)

(1). - An Ilis neve.

Goude ma ve savet un ty,
Lauranç, eo ret en indui;
N'en deo get avoalc'h gementse;
Ret eo e veubli adare
Hac e orni deus ur feçon
Dereat d'ar gondition.

Ret eo oustpen cat peadra
D'e rapari epad ar bloa;
N'ez a ze na badfe get pell,
Hac e ve ret e adsevel;
Mes Lauranç na gompren foel sort,
E speret zo dall, cam ha tort.

(362) Lauranç na c'houl get en defe
An ilis ul liard heve:
N'ouffac'h biqen, Plouarcedis,
Cass da deputet da Paris;
Goelloc'h equetan deus ar vro
Evit ampech an truachou.

Lauranç en deus clêvet larot, (1)
Preven sclêr n'en deus get quelot,
E zeus pèvan rinq cadourion
Placet en ilis tro var dro,
Pere zo caus da galz a vrud,
Dre ma jenont nombr bras a dud.

Ha me da Lauranç a zouten
Penaus ne zeus jenet foeltr den,
Nemet an hini en deus c'hoant;
Mar car, gent un tamic arc'hant,
E vo gen èzet en ilis
Ha Louis-Philip e Paris.

(363) Quelot a raïn zo c'hoas plaçon
Mad assur da receo bancou,
Bancou bian ha bancou clos;
Mes mar chom pelloc'h da c'hortos,

E meus aoun bras na zaoulinfe,
Pa vo devot, var ar pave.

Aboe ma zeus grêt cadourion,
E zân bep sul d'an officou,
Ha na velan bars er porchet
Nemet ar re o deus sec'het,
Hac a brefer ur bortion
D'an oferen ha d'ar sarmon.

N'en deo get en defot a blaç
E veler tud er vored c'hoas;
Pedi Doue bars en ilis
A ve evite ur suppliq.
Me a gred e capent quelloc'h
Chom er quêr da voerza o moc'h.

(364) Hac e ve un templ batisset
Teir quech francoic'h get n'en deo gret,
Birviden na vo suffisant;
Mar clasqer dre cheurtamant
Chom oll dirac ar balustrou
Hep carga ar plaçon gollo.

Biscous meuioc'h urz na voa bet
Ebars ilis vras Plouaret
Equet na zo presentamant;
Peb tra enhi a zo charmant;
Na eller get, dre drompleres,
Frauda e droit deus ar Verc'hes. (1)

Mignon Lauranç quechal en Franç,
Pa voa oll buissant an noblanç,
Ar galité avoa tra vad;
Hirio pa zint eat oll a blad,
Na roer assur penn da zen
Nemet fontet var ar lezen.

(365) Neus get fors pell ebars en templ,

(1). - Hervez e son.

(1). - Ar Batrones.

452

A ze ec'heus bet un exempl,
 Ar Barner couls hac ar re all,
 Pe n'en deo get just ha leal,
 A voe casset bras d'ar rêson,
 Mar queo faus e Bretantion. (1)

Labour spe'ta cat qualite,
 Ha scrifa memes d'ar roue,
 Al lezen a vo e vestrez;
 Guelet c'heus ar roue Charles
 Erit beza torret e le
 Distronet n'eur ober tri de.

Evidout, va faour qes Lauranç,
 Na vi get casset deus a franç;
 Mes gallet e ve da zastum
 Elec'h m'altes trapout ur rum,
 Dre ma prestes d'an dud comzou (366)
 N'int deut james deus o quenou.

Goude ar mear, ar fabriquet,

(Vol. IV, p. 358-367.)
 25 str. numérotées.

Da bere plaçou zo dleet,
 Laca arauc nep a quiri,
 Pipi ar Morvan pe Yan Pi. (2)
 Dirac Doue hac al lezen
 Eo ingal an oll francisien.

Bremâ arauc ma êchuin,
 Deus Alan vras e leverin
 Eo un tenzorier a venit,
 Abalamour m'en em acquit
 Gant conscianç eus e zever,
 Nos-de e mâ gant e affer.

Mes, te, Lauranç, poez da varchou,
 Ha dilès ar rismadellou;
 Bremâ a zo ur richer dreut (367)
 Vit an dud a labour gant neud:
 Gant ar vesqen hac ar vulzun
 E refomp qentoc'h hor fortun.

fin.

(1). - Ar Barner hac e c'hreffier a voe chasset deus eur banq dre urz an
 A. E[sc]op hac an A. Prefet.

(2). - Pipi Morvan, den Pinnidic; Yan-Pi, paour-queuz